

# CHANSON AR BRIEDELEZ

War don : La petite Bretonne.

I

Me ha da ganan excellant  
Avantajo ar plac'h yaouank  
Paotred yaouank demeus ma noad,  
Kemeret true deus ma stad.  
Ma seitec bia zo achuet  
Aboue ar gouan tremen,  
A ma mije bet eur vamm vad  
Oant dimezet aboue oan en noad.



DISKAN :

Me a meuze kavet  
Eur paotr koant da gamared,  
O sonjal enan me meuze joa  
Tra la la la la la la.  
Me meus huyreet divoarben an Nedelec  
Me vo dimeet vit ar bla  
Tra la la la.

II

Oar ben ma c'hario ar gouan  
Dimin ma mamm a desiran,  
Ma goele a gavan ledan  
Da gousket ebars ma unan.  
Da gaeran enor neb ma sonje  
Eo kousket gant eur paotr an noz,  
Me grogo stard e n'em fried  
A bonjour d'an amourousted.

III

Oar ben ken nebeud a deio  
Ma merc'h a diminuo o pajo,  
Na nefet ket d'an ebato  
Ken nebeud d'an assambleo  
Ar guer, ma merc'h, vefet kaad  
Tal eur c'havel o ruskellat :  
Eur paotr a gana oar an dro  
A choui deus ar zon a danso.

IV

Ma mamm, c'houi zo aru noajet,  
Hag esperan a zo disket.  
Ma c'heus, mar plij en tamm madelez  
Kelenet o krouadurez.  
Ia me a meuze kleved laret  
Ar baotred ve aliez fachet.  
Roet din ar sacred ebars en grace  
Vit ma telc'hia ma vod difach.

V

Penos c'halfen expliquan d'ac'h  
Arog ma timefet ma flac'h  
En amzer gentan o timin  
Nem lakeet da gommandin.  
Gret d'ho paotr mont da labourad  
Abred, diweat ebars ar park,  
A velse vo muoc'h leal  
Nevo ket c'hoant da wintial.

VI

Ma sonj a zo na neket fall  
Me a oar ive gwintial,  
Dre ze da ma vod ma reio  
Deus ar goellan possabl a vo.  
Beb noz, n'he wele excellant  
Nevo the gant rhum pe gwin ardant ;  
Goude me delc'hia oar ma guis  
Da bokat dean ken vo skuiz.

VII

Breman, ma merc'h, et da d'imeet  
A groet neuze vel ma kerfet;  
C'houi na gomprenet ket, ma merc'h,  
Pesort amzer a zo warlerc'h.  
Ar baotred neuz bisajo flour  
A kals ane a zo treitour,  
Pa deu ar gosni hag an noad  
Na veket a c'hoant da bokad.

VIII

Evidon nonket koz en noad  
Bepred e gomprenan ar vad ;  
Pa ye ar paotr deus ar c'hoste  
A dom an anter ar goele.  
Breman doman nean a genn  
Deus an daou goste d'an daou benn.  
Ma gavan trist e em sonj  
Kousket ma unan en noz.

IX

Eun defaut da gavet ma desir,  
Ma mamm me gav eun amzer hir  
Na desiran netra n'em c'halon  
Nemet an hano a itron.  
Ouspenn a meus c'hoant da gavet,  
Ma mamm, eur paotr koant da bried ;  
A neuze ganfomp allies  
Kanaouen ar briedelez.

Hyacinthe AR VAOU.

B 131 00.1187